



Chapel Santez Madalen e Penmarc'h

PHOTO JOS LE DOARÉ

BLEUN-BRUG

Niv. 106 (Mizieg-Mensuel)
Koumanant - Abonnement : 500 fr.

KERZU 1957

TAOLIT EVEZ MAD

Kasit 500 lur (600 lur kourm. a enor — 1.000 lur kourm. madoberour) da :

**Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.
C. C. P. 1541.90 Nantes.**

Kas ar skridou da : **Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).**

Mar fell deoh beza ezel euz ar **Bleun-Brug** pe rei deom skoazell, kasit ho skodenn da :

**V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.
C. C. P. 544.22 Nantes**

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1.000 lur.

TAOLENN

Penn diweza ar bloaz , gand L. B.	1
Etre skilfou ar maro , eñvorennoù Albert Guichen lakaet e brezoneg gand J. Séité	2
Fest ar maout , gand Laouik	6
Sant Yann Diarhen , gand Kaourintin Riou.....	10
Or pesketaerien , kreski ment ar bagou pe vervel, gand Marsel Kerneiz	14
Teñzor ar brezoneg beo	15

Deut eo er-mêz niverenn 4 « **Les Cahiers du Bleun-Brug** ». Ar houmanant da « **Bleun-Brug** » ne dalv ket evid reseo « **Les Cahiers du Bleun-Brug** ». Evid o haoud, skriva da : **Jean Cormerais, Professeur au Lycée de Garçons, Rennes. C.C.P. 77.60 Rennes.**

Koumanant-bloaz : 200 lur.



133835

PENN DIWEZA AR BLOAZ

Pebez amzer, an hini a vevom bremañ, a lavare din Katou goz en deiz all ! « Sonjit ' ta, emezi, petra ne deuer ket a-benn da ivanti : eur steredenn nevez, war am-eus klevet, hag a ra tro ar bed en eun eur hanter !!! »

Ar pezh 'zo sur eo, park an deskadurez, ha d'e heul tachenn galloud an den, en em ledanna bemdez. Ar ger eo : atao war a-raog, atao uhellog, atao buannoh, heb ehan, heb termen ! Gwaz a ze d'an neb a dorro penn pe droad !

A-barz pell, a gred lod, netra ne hella mui herzel ouz an den, nag e bro ar stered, nag e rouantelezh ar gozed !

An den a vo mestr war lezennou an natur ha war lezennou ar vuhez, treh d'ar boan, d'ar hleñvejou... piou 'oar, ha ne vezo ket treh, zoken, d'ar maro ? Hag e teuo da wir ar pezh a lavare an toueller d'on tud kenta : « Dond a reoh da veza heñvel ouz Doue e-unan ! »

Ar biniou souezuz eo deuet a-benn ar Rused da strinka en oabl ha da vleina hervez o hoant, o-deus, evid gwir, troet nê o 'fenn da e-leiz a dud.

En-dra ma 'z eus kalz oh en em vaga gand al lorh hag ar fouge, o soñjal e galloud an den, re all a venn dizeha war o zred gand ar spont euz ar pezh a hell en em gaoud, en amzer da zond...

Furroh eo derhel an treid stampet mad war an douar.

N'eus ket a dro, emichañs, da veza trist o weled an den oh ober muioh e vestr war ar bed hag o lakaad an traou krouet da zenti outañ, evel pa ve eñ e-nefe o greet.

Gloar Doue eo an den bec, an den yah a gorv hag a ene, an den a laka nerz e spered da denna implij mad euz kemend a zo er grouidigez, an den a boagn da zizelei sekrejou bet kuzet enni, abaoe ar penn kenta.

Peadra a zo eta d'en em laouennaad dirag an nevezentiou a ijiner bremañ... dirag an nevezentiou, hoaz souezusoh, a vo ijinnet en amzer da zond. Ar pezh diskianta a ve tenna re an oll a lorh anezo, ha dond da gredi e teuo an den, a-nebeudou, da helloud tremen heb Doue hag e hello, gand madoù an douar hebken, leunia e galon, evel ma n'e-nije ene ebed !

Kaer e-no an den astenn e halloud ha c'hoari e benn, Doue a jomo atao ar Mestr. N'eo ket an dud desket eo a raio dezañ rei e zilez.

Eun dra all a zo.

An oll draou sebezuz a ijiner hirio ne roont gwir ebed deom d'ober fae war an amzer goz. Rag, ma 'z eom buannoh war a-raog eged gwechall, arabad kredi ne vije bet nemed panezennoù war an douar, en amzer dremenet.

Ha kaoud a ra deoh edo e spered hag e skiant en e voutou gand an hini e-neus kavet, ar henta an doare d'ober poultr ? edo e zaoulagad en e hodel gand an hini e-neus greet ar genta horolaj ? edo eur genaoueg an hini e-neus moulet al leor kenta ?

Ma 'z eus bet kavet, en amzeriou-mañ, leun a draou kaer, ha n'eur ket dleour d'ar re o-deus pcagnet, en on raog, hag o-deus, dre o labour, aliez kuzet ha divrud, distrouezet ha digoret an hent ?...

P'e-neus greet e zoñj da groui ar bed, ar Hrouer n'eo ket bet falvezet gantañ peurober peb tra, c'hoanteet e-neus e rafe an den e lod hag e labourfe d'e dro, gand nerz e ziouvreh hag e spered, da esaad ha da gaerraad ar vuhez.

Ha setu perag e lavarom, ma 'z eus eun dra hag a dlefe mond war-raog, da heul an deskadurez hag an nevezintiou, eo ar **Mad**. Hogen, ha mond a ra ? Ha gwellog om eged on tadou koz ?

Ha bez 'ez eus ennom muih a vadelez, a garantez, a furnez eged enno? Ha gwelloc'h kristenien om-ni?

Eno ema an dalh! Eno ema ar gudenn a rafe mad da beb hini ahanom klask dibuna a-zevri gand penn diweza ar bloaz.

L. B.



Etre skilfou ar maro

**Envorennoù eur paotr yaouank euz Montroulez, Albert Guichen,
renket ha lakeet e brezoneg gand Job Seite**

Na pebez devez eüruz evidon!

Echu beza kroufet etre mogerioù eur skol, echu santoud ha gweloud daoulagad lemm or mistri o para, o furchal heb ehan warnom hag en dro deom, evid on dalher sioul ha didrouz.

Nijet kuit ive eürioù hir ha didermen, a dremenem er zal-studi, heb grik ebed.

Echu hoaz moustra war on muzelloù, preset atao da lavigad, pa ranken gedal er zal-debri an aotre da gaozeal, goude eur bedennig verr.

Echu bremañ sevel war-zu ar japel, an eil goude egile, goustadig ha sioul, pa zantem dindan on ivinoù ar gwad o virvi, en divesker ar hoant da fringal.

En dervez-se, ya, e tilezen Skol an Aot, e Gwiseni, eüruz. Dibradet am-oa er bloavezh-se va diplom C.A.P., ha lorh ha fouge a oa ennon, med, e skoaz ha skoaz gand ar 'frankiz adkavet, e prizen nebeud e dalvoudegezh.

Bremañ avad eh en em zanten eun den! Bremañ e krede din beza eur gwaz, gouest da anavezoud ar vuhez! Petra virfe ouzin da nijal gand va diouaskell va-unan? Netra. Kaer meurbed oa peb tra en dro din.

Ha kouskoude, morse n'em-bije kredet ar heuz am-eus bet goude-ze d'ar bloavezioù-ze, tremenet ken dibreder.

Ped gwech em-eus soñjet diwezatoù e gwele bihan ha blod Gwiseni pa'm-eus ranket chom aliez en noaz pilh, war an erh, e-pad meur a eur, en noz, war blasenn kamp Buc'henwald, da hed al tro or galv!

Pegen aliez eo nijet va spered ive war-zu sal-debri ar skol, pa varven gand an naon, koulz lavared, e kampou ar maro!

Pebez kerse am-eus kavet koll or chapelig vihan, e-leh m'oa êz pedi! Ha kouskoude, d'ar poent-se, ne ouiem ket, ken techet oam atao da vond a-eneb peb tra, an dalvoudegezh he-doa an overn, eur bedenn desket dindan eñvor. Kredi 'reem on-oa aze hebken eul lastez roll a rankem heuilh da heul reolennoù striz ar skol. Er boan, en anken, em-eus kavet, dizoloet kentoh goude-ze, an nerz a zeue euz eun overn kleve hag heuliet e kuz, talvoudegezh dispar eur bedenn greet a greiz kalon. Kement-se a ree vad, a zegase nerz-kalon da stourm ouz ar vizer, rag Doue am zelaoue.

An darvoudoù ez an da gonta amañ bremañ a zo degouezet gand daou baotr yaouank, bet asamblez er skol e Gwiseni. Unan anezo e-neus bet an eurvad da zond en-dro, egile a zo maro, er boan, er vizer, pell diouz e vro, pell diouz e dud. E an a zo skrivet hirio e lizerennoù aour war mogerioù Skol an Aot, « Maurice Prigent ».

Penaoz on bet paket.

Nebeud amzer goude beza kuiteet Gwiseni, d'ar 26 a viz Kerzu 1943, on bet paket e Montroulez da heul 60 all, gand an Almanted. Ar gêr a zo kelhet gand soudarded S.S. Heb goût deom perag ha penaoz om kutuilhet, kaset war-zu an ti-kêr.

Eun dibab a zo greet en on touez. Kant kanter kant a zo ahanom. Eun ofiser prusian, gand eur gravachenn en e zorn, a dremen dirazom, a zibab, n'eus forz penaoz, ar re a zo da veza dalhet. Beleien a zo ive en on touez. Lezet int da vond kuit. Perag? Gand aon da gaoud afer ouz tud a zalh er bed-mañ plas an Aotrou Doue? Ne gredan ket, rag evidon da veza yaouank hoaz, oan mantret gand an den-ze a zibabe unan amañ, unan ahont, e-giz ma vefe bet dirag eur vandenn jatal.

A-gostez on lakeet gand 60 all. Ni eo a dle pèa evid beza dalhet penn ouz an Almanted o vresa bremañ or bro. Kaset om neuze, etre soudarded, beteg park ar hirri-nij, renket dirag soudarded a welom o 'fuzuilhoù astennet war-zu ennom: da gredi on-oa e oa echu ganeom. Evid eur wech kenta e savas aon ganin, eun aon a lakee ahanom da grena. Seblantoud a ree din santoud skilfoù heuguz ar maro o spega ennon. Mervel dija! ken yaouank all! Nann! Ne fôte ket din hoaz mervel! N'o-doa ket a zroad d'henn ober. N'int ket eet beteg eno; kredabl braz n'oa nemed evid ober aon deom.

Klozet om goude-ze e barakennoù. Eur zizun a-bez e chomom evel-se. Bez 'e hellom gweled or herent. Kalz frankiz a zo lezet ganeom ouspenn. Dond a reom da gredi e vefem lezet da vond kuit heb dale. Allaz! an esperañs-se eo on kollas. Bemdez, meur a hini ahanom o-dije gellet sachha o skasou ganto, tehet kuit, med gand aon da weled re all dastumet en o 'flas, den ebed ne glaskas tehout kuit.

En eun taol-kont, setu m'eo roet deom da entent emañ o vond da guitaad Montroulez. Eur beleg, deuet d'or gweled, a hell kaoud aotre da lavared eun overn. Morse n'em-eus ankounac'heet an overn-ze, a roas din da gompren gwelloc'h galloud trugarezuz an Aotrou Doue, a anavezen ken fall. Tri blankenn... eun aoter! Eur groaz noaz... ar boan! Eur goulou-koar war elum... ar vuhez! Eur beleg... Doue en on touez! Heuilhet on-eus an overn-ze, o pedi Doue d'or skoazella, d'on harpa, gand fiziañs ive kaout digantañ nerz a-walh da stourm bepred eneb ar reuz a venne koueza warnom.

Sammet e kamionoù, om kaset beteg porz-houarn Montroulez ha klozet dioustu e teir vagon marhadourez. Eur bern tud, or herent, or mignoned, en enkrez, a zo eno war-dro, o selled ouzom, heb gelloud ober seurt. An eurvad am-eus da helloud gweled, evid ar wech diweza, va herent ha va mignoned, an daelou en o daoulagad. Neuze e sav, en desped d'ar gedourien, frêz ha têt, komzou frealzuz ar ganaouenn: « N'eo nemed eur henavo, va breudeur! » Evid kalz ahanom, siwaz, e vo ar henavo diweza d'o bro' garet Breiz-Izel! Evid an oll, setu penn an hent war-zu n'ouzom ket da be leh!

En deiz war-lerh e tegouezom e Compiègne, er hamp anvet « Royal Lieu », anavezet ha brudet fall evid beza eul leh a spont, a dristidigezh. Euz ahalen e kemerer an hent war-zu kampou kriz an Almagn. Petra lavared euz al leh-se? Netra, nemed oam hualad koulz lavared etre renkadoù ha renkadoù orjal-pik. E touribelloù anvet « mirador » ez eus atao gedourien dihun ha war hed, prest da denna war ar re a glaskfe tehout. En noz, chas a vez distaget ha lezet da vond da zond dre ar hamp. Da ziwall on-eus, pa'z eom er-mêz euz ar barra-kennou, ouz o skilfoù, pe hoaz ouz an tennou. Diou wech bemdez on-eus eul lastez-boued, m'ohaj hebken. Kouskoude, peogwir emañ hoaz dindan ar Groaz-Ruz hall, e hellom kaoud eur wechig an amzer eun nebeud boued sasun a ra eur vad dispar deom.

Amañ e kavan va mignon M. Prigent, dastumet gand an Almanted evid beza eseeh tehed da Vro-Zaoz. Atao e veze prest da 'farsal, da hoarzin, da ober troioù kamm pa'z eem d'an overn. Karoud a reen anezañ kalz, eeun, didroñell e oa, eur mignon euz ar henta. N'oam nemed bugale evid hoaz: asamblez ez

eem bremañ da zeski diwar or houst petra eo ar vuhez, pegen kaled ha pegen rust eo.

En hent war-zu an Almagh.

Adarre e teu an urz da vond kuit. En taol-mañ, avad, e houzom war-zu pe leh ez eom, etrezeg an Almagh. Den ebed en on touez ne helle divinoud an trubuilh a gouezo warnom diwezatoh. Biken n'or-bije kredet.

E porz-houarn Compiègne, eun tren marhadourez or gortoz. Kant e peb bagon om taolet, a daoliou kravachenn. An eil war-lerh egile, hini ebed ahanom, koulz lavared, n'hell azeza. Araog sevel en tren, on-eus beb a damm silzig, bet lakeet ennañ eur gwiskad hollen. Souezet dirag seurt madelez digustum a-berz an Almanted, e lonkan dioustu va zilzigenn, rag naon du am-eus. Ar re all a ra ar memez tra. M'or bije gouezet ! Eur zehed spontuz a grogo ennon e-pad ar veaj goude-ze. En noz, va muzellou a zeu da goeñvi. Dour ! Dour ! Ma 'm-bije gelllet kaoud eur banniig hebken evid glebia va zeod ! Eun tachadig goude, unan bennag a hell tehoud kuit euz ar vagon. Gand eur gontell-heskenn int deuet a-benn da doulla ar hoad. Meur a hini en em daol er-mêz dre eno, an tren err warnañ. Lod anezo a gouez heb droug ebed, lod all siwaz en em laz... Chañs, dichañs, setu lodenn ar re a gemer atao eur riskl bennag. Eur zehed par da hini an ivern a zev ahanom. Bern war vern en or prizon war railhou on-eus poan o kaoud on alan. Eur mouchadig êr a deu euz an toull greet evid tehoud, daoust ma oa red e stanka pa jome an tren a-zav.

Degouezet e Trèves, ar re a zo karget d'on diwall a deu da houzoud e vank meur a hini. Lakeet om da ziskenn war ar hae. Eur banne dour or bezo amañ, a gredom. Dre veñjañs netra ne vo roet deom. A daoliou kravachenn e rankom en em ziwiska penn-da-benn. Hag en hent adarre, heb dour na boued. E-pad ar rest euz an hent, n'ouzon dare penaoz em eus gallet stourm. Diwar neuze e kollan, koulz lavared, peb intentamant, beteg degouezoud e Buc'henwald. An tan a zev or hornailhenn, on teod a jom seh korn; kaer on-eus e lavigad. Evid esea kaoud eun tammig freskadurez eo red frota ar muzellou war barrinier houarn ar prenecher, stanket ouspenn gand koad diouz an diavêz. Lod ahanom a dremen o zeod ouz kosteziou ar vagon, evid gelloud lipad ar hwezenn a oa warno. Va-unan on eet beteg eva va zroaz. Ar zehed atao, eur zehed iskiz a lakee ahanom da goll peb skiant. Em hichenn unan ahanom a goll e benn evid mad. Me ive a zo bremañ hanter diskiant. Dreist an arroudenn eo eet ar verzerinti a zo ouz or gwaska. Ar spered ennom a zo evel teuzet, ne jom mui nemed ar horv.

Buc'henwald.

Goude daou zervez ha diou nozvez, on tren erfin a jom a-zav. An doriou a zigor warnom. Eun êzenn yen, sklaset, a zihun ahanom. Dond a ran ennon va-unan ha santoud a ran ar vuhez o tond adarre en-dro. Eul lamm a ran war an douar. Erh a gouez. En em daoler a reom war on puehou en erh. A zornadou e tebrom an erh. Pebez frealzidigez ! Santoud an erh o teuzi er genou ! Taoliou treid, taoliou kravachenn a gouez warnom : ne reom van ebed. Eva a hellom ! laza an tan a zev or hornailhenn ! Pebez levenez ! A greiz kont e sav klemmou harzadennoù : chas a zo lezet da zond warnom. Sevel a ran buan evid en em daoler er renk. Eur chañs am-eus : taol dant ebed n'am eus paket. Renket dre bemp om dastumet en eur vandenn ha kaset, bountet evel chatal, war-zu dor vraz ar hamp a welom prest goude durazom. Gand truilhou war or hein, n'on-eus mui an êr euz a dud. Ar re veo a zoug ar re varo ; ar re a jom ganto eun tammig nerz a zikour ar re na hellont mui nemed en em ruza. Euz on daoulagad e teu eur zell diskiant. Louz ha truilheg, lod a jom ganto eun nebeud dilhad, lod all a zo en noaz.

Soudarded S.S., karget da ziwall ar hamp, a zell ouzom o tremen, eur mouse'hoarz goapañz war o muzellou. Loh ha foug a zo enno o weled trehet ar re a oa o zoñj o zreh. Ne ouzont ket, avad, e chom beo ha birvidig hoaz or halonou, eo beo ennom hoaz an tan, om gouest da zerhel penn, da stourm e diabarz ar hamp. Eun ofiser S.S. a ziskouez deom dor vraz ar hamp en eur

lavared : « Sellit mad outi, ebarz ez eoh drezi, er-mêz avad ez eoh dre ar 'fourn. » Gwelet e vo, am eus lavaret ennon va-unan, klask a rin atao kemered eun hent all ! Doue e-neus va zikouret.

Emaon evid mad e diabarz kamp Buc'henwald, emeon o vond bremañ da anaoud buhez an ivern milliget-se. Falh an Ankou, didruez, a droho, a droho eur maread ahanom.

A-veh degouezet war al leh, dour warnom evid lemel diouzom ar hag. Touzet or bleo e pakom goude-ze eur gwiskad grizilh a zev or hroheñ. Gwisket evel galeourien gand dilhad barrennet glaz ha gwenn, en dro d'on troad, tammou lienaj, eul lastez boutou koad... setu on oll beadra ouspenn eun niverenn (numero). Ingalet om goude-ze e barakennou koad, on lojeiz. Hed eur zizun e chomom heb labourad. E-pad an amzer-ze, avad, e pakom pikur war bikur. An nadoz a vez plantet ennom pa zoñjom an nebeuta. Peseurt louzou a vez silet ennom ? N'ouzon dare. Evid moh-Indez om kemeret gand ar vedisined a zo er hamp. Diwar neuze, evid gelloud chom beo, eo red labourad. Eur vengleuz a zo harp ouz ar hamp. Samma tammou mein, karga, diskarga, beza eur mell euz ar jadenn a rank trei, setu va buhez. Pemp taol kravachenn war-n-ugent a baker pa gouezer war an erh. Bale a rankom gand aon da rikla, rag an erh a stag hag a speg ouz ar bouteier.

Er barrakennou e krog ar vuhez da vond hebiou, goustadig. Kousked a reom war pleñh koad, renket an eil war eben, beteg pevar estaj. Peb speurenn a zervij da hweh den. N'heller ket gourvez war ar hein, red eo en em astenn ha kousked war ar hostez evid m'e-no peb hini e dammig plas. Eul lastez pallenn, gwriet a laou, a holo tri asamblez.

Diouz ar mintin emeon war-zao ken abred ha pemp eur. Bodet goude-ze war blasenn vraz ar hamp e chomom eno aliez teir, peder eur, en or sav, o krena gand ar riou, dindan eun avel yen ha put. Soudarded S.S. a deu hag a ya, en on touez, evid or honta, on diskonta. A-wechou e houlennont diganeom peseurt micher on-oa araog, en or bro. Alese neuze e kemerom hent ar vengleuz, heb tamm. Ar re o deus bet bolontez a-walh da espern o zamm bara en derhent a hell debri araog mond d'al labour, ma n'eo ket bet laeret diganto o zamm kreun e-pad an noz.

Diouz ar pardaez e kavom or barrakennou, brevet gand ar skuizder, hanter varo gand an naon. Red eo adarre gortoz ar galv, e-pad eun eur pe ziou, a-raog kaoud eun tamm bennag da zebri, a-raog tañva ar gundu treut-gagn : eul lastez soubenn, eun tammig bara, eur begad amann chimik.

Araog mond da gousked, eun dervez, e ran anaoudegez gand eur beleg euz Bro-Hall e vev ganeom en or barakenn. « Karoud a ran, emezañ, an amzer a rankom bemdez tremen war an erh, rag neuze, pa houlenn diganin ar soudarded peseurt micher am-oa araog dond amañ, e tisklerian dirazo on beleg dreist peb tra. » Sebezet e choman dirag nerz-kalon an den-ze hag a zoñj eo bolontez Doue eo e-neus e lakeet aze evid sikour ahanom. E boan, e nerz, atao e vez prest d'o rei evidom. E feiz a zo ken stard, ken nerzus ma ne ra netra aon dezañ. Hen gweled a ran hoaz, eun abardaez, o tond war zikour unan ahanom. Hemañ a zo o vond da vervel, astennet war an douar. Ar beleg war e zaoulin en e gichenn, a gomz outañ gand teneridigez, a ra warnañ sin ar groaz. An oll o-deus lammet o boned, Gallaoued, estrenien hag all, pe e kredont, pe ne gredont ket. Gand doujañs ha respet e chom an oll sioul dirag an hini a zo war e dremenven. Ar beleg a oar e peseurt riskl eh en em lak, rag divenn a zo, dindan boan a varo, ober abostolerez e giz ebed. Meur a veleg a zo bet dibradet evid an dra-ze. Petra int deuet da veza ? Ano ebed ken anezo goude-ze. Re all e gemere o flas hag o labour a gendalhas.

Setu eun diverra euz va buhez e Buc'henwald. Kroaziou a heb seurt on-eus bet da zougenn, pounneroh marteze an eil eged eben. Ar maro ive a reas e reuz e-touez eur halz ahanom. An tan a zeuas a-benn euz o horvou hag al ludu a jome war-lerh a zo bet taolet er pevar avel.

Buc'henwald, eun toull ivern er bed-mañ, trempet gand ludu tud varo, glebiet gand daelou ha gand gwad sklavourien.

(Da genderhel.)

FEST AR MAOUT

Tud Lanbaol a zo boaz, du zul, da zelaou abadenn vrezonég Radio-Kimerh. En em gaoud mad a ra, just goude lein, a-raog ar gousperou.

Daou viz 'zo, war-lerh an taol binigou, e klevjont kement-mañ : « Tud a zo, e Breiz zoken, o-doa prenet dilhad-kañv evid mond da anteramant ar brezonég ; ha padal, e welont pobladoù tud gwisket en o haerra, o sevel gouelioù stankoh-stanka, bravoh-brava, gand dañsou ar vro, kanaouennou ar vro, hag o tiskouez int fier da veza Bretoned.

Enori a reont ar brezonég beteg lakaad digeri dirazañ dor ar skolioù.

Hirio (eme an den a gaozee er radio), ez om bodet amañ, e Brest, aotro-nez ministr, senatour, mêr, evid diskuilha dirazoh ano ar skrivagner brezonég a zo eet gantañ priz braz *Emgleo Breiz*, eur priz a 50.000 lur a vez roet beb bloaz d'an hini a gas d'ar varnerien ar skrid brava e brezonég.

Gounezet eo bet ar maout, er bloaz-mañ gand *Mab an Dig*. Lakeet e-noa lennerien *Bleun-Brug* ha selaouerien *Radio-Kimerh* ha hoarzin gand e istoriou *Saout Lanbaol*, ha barnerien *Emgleo Breiz* gand e istoriou nevez *Kizier noz Sant-Pabu*.

Daou vloaz a zo ema *Mab an Dig* er Marok, ar pezh ne vir ket outañ da gonta marvailhou c'hoarvezet — en e spered da vihanha — en e vro hinidig. Da hortoz din kaoud ar blijadur hag an enor da lakaad war e benn ar gurunenn lore, e kasan dezañ en hoh ano, aotrounez ministr, senatour, mêr, ha tud a gondekañs a zo amañ en dro din, or gourhemennou.

Ken strafuilhet oa Jañ Vraz, o veza klevet seurt kelou ma 'z eas kuit d'ar haloup er-mêz an ti, ankounac'heet ganti mouga he radio.

En em gaoud a reas a-benn gand Seza Gerven.

— O ! Seza, emei, pebeuz kelou gand ar radio !

— Eur gwall hini ?

— Ar hontroll, *mab an Dig*...

— ...a zo anvet da eskob ?

— Posubl eo ; n'oun ket sur, avad, rag n'oun ket chomet da zelaou pelloh ken fromet on.

— Fromet gand petra 'ta ?

— Gounezet gantañ eur maout.

— Eur maout ? Ablamour da betra ? Eur maout ? ha petra raio gand eur maout ma teu heb dale d'ar vro hervez er gaoz ?

— Mad ! Kleved mad em-eus, eur maout e-neus gounezet, eur mellad hini, mistoued (1), hag euz eur ouenn n'eus ket anezo er vro ; unan a 50.000 lur.

— 'T 'ahe ! eur chañs deom, 'vad ! Roull a ray ar homers amañ gwasoh eged biskoaz. E boltred a vezo ranket sevel da *Vab an Dig* war ar blasenn.

— Abaoe m'eo eet brud saout Lanbaol d'ober tro Leon, kement a brez a zo warno ma vezo ranket sevel kreier nevez da lakaad ar zaout a brener e foarioù Lesneven, ha Lokournan, ar Roh hag e leh all, hag a deu amañ da veza badezet saout Lanbaol.

— Teod fall a zo ahanout ! Anad eo e kredez kaochou Job ar higer. En deiz all adarre, droug ennañ ablamour n'e-noa ket Per rabatet a-walh dezañ, hag ive ablamour e-noa eur banne mad dindan e fri, edo o youhal en ostaliri : « Saout Lanbaol, saout Lanbaol, eul leue beb tri miz gand peb hini ! » War zigarez ez eus chañs gand o leueou.

Edo an trede son o vond evid ar gousperou. Laniz-Paol a dostee ouz an iliz. Ne gleved euz an eil d'egile nemed : « *Mab an Dig* — 50.000 lur — eur maout ».

En iliz koulskoude ne oe kaoz ebed gand den ebed e-pad ar gousperou.

N'oa ket noz hoaz pa oa deut kelou ar radio d'ober evel saout Lanbaol : kreski o niver : klevet oa bet ar ministr e pokad da *Vab an Dig*, klevet oa bet ar *Marseillaise* hag ive ar *Bro goz*. Sur e vije warhoaz poltred *Mab an Dig* war ar journaliou.

Allaz ! n'edo ket. Se a reas memez tra ar buro butun gwerza ar hazetennod oll, gand butun ousspenn, hag eur banne bennag, kavet gand ar wazed eun digarez da zond di da houzoud hirroh.

E-leh, avad, e boltred, e oa war ar journaliou eun « avis » da guzulierien ti-kêr Lanbaol d'en em voda da veurz diouz an abardaez evid gouzoud petra ober da enori *Mab an Dig* pa deufe d'ober dizale eun droiad er barrez.

Ne vanke den ebed er honseilh.

Divizet e oe war an enoriou a vije kinniget — arabad beza piz war an dispign da vihanha, a asante peb hini. Biskoaz n'oa bet ken pinvidig tud Lanbaol. Brud ar zaout war-lerh skridoù *Mab an Dig* a oa penn kaoz ma ne oa er barrez den ebed ken o vond war e droad.

— Oll otojou, veloioù dre dan, trakteurien zoken a yafe beteg Gwitalmeze d'e ziambroug.

— Ha brallet e vo ar hleier.

— Ken na faoutint !

— Enoriou eun eskob !

— Ha perag ' vijent ket ?... en avañs ! piou oar ?

— Kinnig a ran, a lavaras Yann Vrichin, ma vezo renket ar zaout a beb tu hent ar bourg, euz a di ar seurezed beteg porched ar vered, ha...

— ...staget fleur ouz o herniel.

— Ha desket d'al leueou kana...

Me lavar deoh ; peb hini er honseilh-ze a oe a-du gand forz petra kinniget gand ma vije eur pred braz.

— Bezom fur, eme ar mêr. Ne vo ket brallet ar hleier...

— Nè vo ket laosket al leueou da gana ; eme ar Brichin.

— Med konseilh an ti-kêr, an aotrou person gand gouarnourien ar barrez, mistri, mestrezed ha bugale ar skolioù, ha, da nebeuta, unan a beb ti, a vezo amañ dirag an ti-kêr, p'en em gavo *Mab an Dig*, a ordrenas ar mêr. Prenet e vezo eur gurunenn lore ha loreet e vezo ganen, ha n'eo ket gand den all ebed, da fin ar pred braz a vezo servichet e ti Yoñ an avel uhel.

— Da guzulierien an ti-kêr ?

— War gont ar barrez ?

— An trafikierien saout Lanbaol a baeo, emichañs, ar pred-se deom ?

— Peoh ! eme ar mêr. Peb hini diwar e goust.

Ha bemdez Doue, e-pad eur miz, Lanbaol a oa war hed. Ped ha ped lizer a en em gavas er Marok gand *Mab an Dig* goude-ze ! Biskoaz kemend-all ! a lavare bemdez potr liziri ar hazarn. Petra an diaoul a zo c'hoarvezet en eur vro ken gouez ha Lanbaol Gwitalmeze ? Kaer e oe glabousad, *Mab an Dig* a jome mud... Ken mud ha saout Lanbaol... nemed da noz ar pellgent.

Soñjal a reed koulskoude edo o prepari mond e permission. E voned a oe disgriet, kempennet, feret, galonset ; e zê hag e lavreg a oa greet kemend-all dezo ; stardet e oe ar boutounou deut da veza re laosk ; prenet e oe eur re voutou-ler fantezi.

A-viskoaz *Mab an Dig* a zo bet lent ha digamambre. N'e-noa ket lakeet tenna e boltred gwisket gand e zilh aomonier, tri galoñs aour warno, heñvel-poch eta euz eur habiten kirri-nij.

Ha setu perag kerent ha mignonet a oa e gar Brest ouz e hed al n'anavezjont ket anezañ war an taol. O veza edo e dintin Mariañ da dosta dezañ p'en em gavas *Mab an Dig* e sal ar veajourien, dezi eo e pokas da genta. Mariañ, souezet, a gulas eun tamm evid solded ouz dihad kaer e ni, o lavared dezañ : « Ne ouien ket e oas eet da fakteur ». An oll a zirollas da hoarzin. Komañs brao a ree an digemer.

Ne oe e Lanbaol na kleier, na trompilhou, na bombard, na biniou. Klevet e oe saout o vlejal. Ne ziskouezas ket *Mab an Dig* oa tenereet e galon ouz o hleved.

Dornadoù amañ, pokou aze, taolioù dorn war e skoachou, e gein : karet eo, anad eo.

An dra-ze a oa da wener. Kig-vijil a oa bet er presbital ; ne falvezas ket mond di gand e lein. Pedet gand ar mêr, e lavaras dezañ : « Kenavo disul ».

Evel just an dervez kenta a oa hini ar familh. Beh tro ma skrive d'ar gêr, e kloze e lizer gand ar gerig : « Kenta pred, pouloud, da eil, pouloud, da drede, pouloud ».

Greet e oe dezañ diouz e hoant. Beh a zavas warnañ da zadorn da noz goude koan. Daoust d'ar hoant braz e-noa dibri kig ha farz, kila ' rankas.

N'oa ket va zro din beza en overenn-bred. Kleved em-eus konta pegen brao oa bet an ofis, ar zarmoun, ar han. Dre vadelez ar merhed, oan bet laosket da vond d'ar pred aozet en enor *Mab an Dig*. Evid gwir, ne nahan ket kaoud mad eur pred mad, ha n'eo mad evidon nemed pa vez gwin mad. N'em-eus ket da glemm da veza sentet ouz va hov. Lipouz eo bet ar pred.

Da boent ar prezegennoù, ar mêt a zavas, a glaskas, glaskas ha kaer e-noa kas e zaourn euz eur hodell euz e zilh d'eben, ne gave ket e baper.

E godell ar greffier e oa unan, med faziet oa bet hemañ. Digaset e-noa gantañ an diskour e vez kustum ar mêt da lenn dervez konkour braz saout Lanbaol. Ne zellas ket ar greffier mad a-walh ouz ar paper hag henn roas d'ar mêt.

Kregi a reas hemañ kerkent da lenn :

« Pebeuz dervez kaer, hizio, da zaoud Lanbaol ! »

— Ha d'o leueou, a valbouzas Kere bihan, tomm mad dezañ, evel kustum.

Keid m'edo an oll o c'hoarzin, gwelet gantañ ar fazi braz edo o vond da ober, ar mêt a reas an neuz da genderhel da lenn :

« Goulenn a zo warno dreist kont, n'eus ket uhelloh priz e neb leh, ar homers a roull, ablamour deoh-c'hwil, *Mab an Dig*. Meuleudi deoh ha chañs vad !

— Da veza eskob ! eme Kere bihan.

A ! Tudou keiz ! m'ho-pije klevet ar strakadennoù daouarn, ha trouz ar hontilli o lopa war ar gwer hag an oll o krial : « Da eskob ! Da eskob !... »

Ar person a ziskouezas kaoud c'hoant lavared eur ger ive oh ober sin d'an dud da jom peoh. Sentet e oe outañ.

« Gouzoud a rit, emezañ, oa douget war roll ar gouel e vije bet kurunennet ganeom da boent ar hafe ar skrivagner dispar a zo anezañ or mignon braz, or henvroad *Mab an Dig*. War zaou hanter, an aotrou mêt ha me on-doa prenet eur gurunenn lore e ti penturer Gwitalmeze. Glaz kaol oa hag heñvel piz ouz lore nemed an danvez anezi n'oa ket lore, mistouet. Dre zievezed, laosket e oe eur pennad war bardell ar puñs gand va 'flah. O tond diwar ar peuri bioh ar presbital he-doa komañset d'he lonka pa 'z eus bet gellat paka an tamm a jome; ha kentoh eged he holl, ken ker oa bet koustet deom, eo bet lakeet da aoza al lapined ho-peus debret. N'oa ket blaz al lore ganto evel just, liou ar saoz oa hini ar pentur ha n'ho-peus kavet delienn ebed en hoh asiedou...

— Evidon-me, n'oun ket souezet, eur pennad brao a zo... ne welan ket... sklêr, a drouhas kaoz ar person Lomig Penn ar Stang, kroget an hig ennañ.

Lanbaol a dregernas a-daol-trumm gand youhadennou paotred ar friko ; *Mab an Dig* a oa savet en e zav.

« Va mignoned, emezañ... »

Ne hellas ket mond larkoh gand e gaoz. E penn eun daol, eur vandennad bizinerien a oa en em lakeet da grial : « Ar maout ! Ar maout ! »

Ar mêt a zellas ouz ar greffier, ar person ouz ar mêt, ar hure ouz ar hloher, o houlenn an eil ouz egile :

« Ar maout ? Ar maout ? Petra ' hoanteont ?... »

Ne oa nemed unan, ouz taol ar pennoù braz, o c'hoarzin : *Mab an Dig* e-unan. N'eo ket kouezet diouz lost ar harr, e hellit kredi, n'e-nije ket bet kemend a halonsou war e zilh d'soudard.

« Va mignoned, emezañ adarre, lenn a ran e doun ho spered. Gouzoud a rit em-eus bet eur priz a 50.000 lur evid beza skrivet e brezoneg gwelloc'h eged ar re all a gemeras perz e konkour braz *Emgleo Breiz*, e brezoneg Lanbaol, ho brezoneg c'hwil. Evid beza skrivet petra ? Buhez kizier-noz Sant-Pabu. Gouzoud peseurt ouenn eo kizier a zo dreist galloud eun den. Ne vezont ket kaset d'ar foarioù ; ne deñ ket a gigerien d'o 'frena. Ne binvidikaint ket Santiz-Pabu,

daoust d'an enor braz a ran d'ezo. Va halon koulskoude a zo eun tamm anezi da Zant-Pabu.

Greet em-eus ho fortun c'hwil, Laniz-Paol, o vruda ho saout. Ober a rin hini Santiz-Pabu. Penaoz ? Gand an 50.000 lur am-eus gounezet o skriva diwar o ler, a lavaro teodou fall a zo, istorioù ar hizier-noz, e prenin dezo eur maout ha ne vo ket...

— Eun hanter hini ! a zistagas Lomig, ar spazer-moh.

N'e-noa hemañ lavaret ger ebed beteg hoaz, ar pez a zoueze an oll, rag Lomig ar Vété, spazer-moh, a oa desketa peizant Lanbaol. Paotr ar hatriem a veze greet anezañ ive ablamour m'oa bet skoliet e skolaj Lesneven beteg klas ar hatriem. Ententet oa war gleñvejou ar chatal hag e louzou a veze fred dezo euz a Blougastell da Eusa. Evel just ne lavare ket petra a yee d'ober al louzou ken brudet. Seiz plantenn ar Werhez da vihanna, a grede an oll. Kaoud a reed e lakee ouspenn ennañ bizinou, dreist-oll.

Gounid brao a ree o veza vétérier. Evid-se ez oa Lomig anvet ar Vété. Konseiller an ti-kêr oa Lomig. Reputet oa da rei aliou fur ha d'o rei aliez diwar c'hoarzin.

War e ali e oa bet kresket an tailhou er barrez abaoe ma oa pinvidikeet an oll gand trafik saout Lanbaol ; eñ a oa e-touez an oll.

Pe tra oe greet gand arhant an tailhou ? Heñchoù nevez, unan, e hellit kredi, da vond d'e garter e-unan e Tredreaz ; ledanneet e oe ar re all. Dreist-oll e oe savet eul labig simant, tost d'an ostaliri-ispisiri-restaurant-buro butun, evid ezommou ar wazed.

O veza ma veze aliez e Pariz o trafika saout ha leueou Lanbaol, kredet e oe Lomig pa lavaras d'ar honseilh e touge lod euz al labigou-ze, e kêr-benn ar Frañs, al lizerennou W.C. a oa ententet gand an douristed a ouie saozneg, ha lod all station-service evid ar re a ouie galleg.

Ne oe ket burutellet diwar lavar ar Vété. Kerkent ha seh simant al labig, penturer Gwitalmeze a skrivas warnañ : « Station-service ».

Aze e rankas an oll, mêt, person, eil-vêr, greffier, renerien oll sostiéou Lanbaol, hag unan euz peb ti ar barrez, en em gaoud da gloza gouel kaer kurunidigez *Mab an Dig*, devez fest ar Maout, lidet e Lanbaol-Gwitalmeze da ouel Mikêl 1957.

Laouik.



Iliz Lanbaol-Gwitalmeze,
kaerra iliz Goueled Leon.

SANT YANN DIARHEN

Sant-Nouga a zo brudet ablamour da gas'ell Ker-Yann, unan euz manerioù kaerra ar bro. Anavezet mad eo ivez e-touez ar vrezonegerien desket, rag eno eo bet savet gand an Aotrou Perrot (Doue e bardono!) ar henta Bleun-Brug, bremañ ouspenn hanter-kant vloaz 'zo. Met eun enor all he deus parrez Sant-Nouga : beza leh ginidig eur Zant : Sant Yann diarhen, pe ar Zantig du.

E yaouankiz.

Ganet eo bet ar Zant eno, er bloavezh 1279. Bevet e-neus 'ta en amzer Sant Erwan ha Sant Charlez a Vleiz. N'oa ket pindividig e gerent, met kristenien vad e oant. O eil mab e oa ar bugelig.

Badezet e oe prim goude e hinivilezh hag anvet Yann. Deut da vanah, e chomas an ano-ze gantañ.

A-raog e ugent vloaz e-noa Yann kollet e gerent. Mond a reas da labourad gand eur henderv euz tu e vamm. Pinvidig-brao e oa an den-mañ, berr avad e relijion. Mañsoner ha kalvez e oa. Dond a reas Yann da veza eur micherour euz an dibab. E blijadur a oa sevel kroaziou e-kichen an heñchou ha dresa-poñchou evid ar birhirined, dreist-oll re an Dro-Vreiz, milierou anezo beh bloaz, o vond da enori ar seiz Eskob, Tadou ar Vro : Sant Kaourintin, Sant Paol, Sant Tugdual, Sant Brieg, Sant Malo, Sant Samzun ha Sant Patern.

Eüruz-braz e oa e ves'r ha kenderv da gaoud eur seurt kompagnun, labourer dournet-mad hag aketuz-meurbed. E kounnar ruz ez eas 'ta pa zeuas Yann da lavaroud dezañ : « Ho kuitaad a ran evid mond e servij Doue. Galvet oun gand Or Salver evid beza e veleg. » Kastizet e oe an den piz : koll a reas e oll vadou ha dond a reas da veza lovr, eñ ha lod euz e vugale. Ouspenn mer-vel a reas eskumunuet.

Person.

Goude beza dilezet gand ar beorien kemend e-noa, ez eas Yann da Roazon. Degemeret e oe e skol ar chaloniad e-pad pevar pe bemp bloaz. E 1303 e oe beleget gand an Aotrou 'n Eskob Erwan. Adaleg neuze e reas pinijenn rust : teir gwech ar zizun e ree e bred gand bara ha dour. Ne zouge nemed dilhad paour. Mond a ree da weloud ar re glañv hag ar beorien.

Prim e klevas an Eskob meuli ar vuhez santel renet gand ar beleg yaouank. Ha setu ma anvas anezañ da berson-chaloni parrez Sant-Gregor, e-kichenig Roazon, d'an naonteg a viz Mae 1303, en deiz ma varve Sant Erwan Helouri, person santel Bro-Dreger. Da gure edo gantañ e vreur hena.

Bez 'e oe tad e oll barrezianiz, dreist-oll hini ar re baour. Evito e tiouere ar muia ma helle, heb truez ebet outañ e-unan.

M'e-noa gwechall renket heñchou e Bro-Leon evid ar birhirined, amañ, e Bro-Roazon, e kempenne an eneou. E-pad trizeg vloaz, diarhen, diskabell, ez eas, en eskopti a-bez, da brezeg ha da goves a-raog ma tremene an Aotrou 'n Eskob er parrezioù. Nag a beherien o-deus adkavet hent ar Baradoz o klevoud prezegennou entanet ar beleg santel !

E 1316 e teuas Yann da gavoud e Eskob evid rei dezañ an dilez euz e garg a berson. — « Va soñj, emezañ, abaoe pell 'zo, eo mond en urz Sant Fransez. » Evid e drugarekaad euz ar vad e-noa greet en eskopti, e fellas d'an Aotrou 'n Eskob envel breur hena Yann da berson Sant-Gregor. — « Na rit ket », a respontas ar Zant. « Anavezoud a ran mad-tre va breur. Ha red eo din lavaroud deoh ne vo ket anezañ eur person mad. »

Manah.

D'e 37 vloaz e teuas 'ta Yann a Zant-Nouga da houlenn beza degemeret e kouent Kemper. Savet e oa hemañ e kember ar Ster gand an Oded. Unan euz e vadoberourien vrasa a oa Aotrou Pont 'n Abad, en amzer-se unan euz uhella aotronez Bro-Gerne.

Raktal e oe Yann eur manah euz an dibab, eur gwir vab da Zant Fransez Asizi.

Braz e oa e spered a bedenn : a-raog hanternoz ez ee d'an iliz evid pedi, e-harz an aoter. Chom a ree eno beteg koueza war an douar. Daerou puilh a skuilhe e-pad an overenn. Diou wech bemdez e lavare an Ofis. Hag ouspenn e tibune Ofis an Anaon, pemzeg Psalm an Dereziou, seiz Psalm ar Binijenn, Ofis ar Groaz, hini ar Spered-Santel, ha pedennou all hoaz. Ha n'eus forz peleh e pede : o labourad el liorz pe o vale e kêr.

Ha peseurt pinijenn e hini ! Gouzoud a ree brao-tre kastiza e gorr, « ar breur azeñ ». Tri seurt rochedou e-noa : an hini esa da zougen, greet gand mezer teo ha stoup, he dije hegaset kein eur marh ma vije azezet unan ben-nag warnañ. An eil a oa eur roched reun-marh gand skoulmou teo. Greet e oa an trede gand krohenn eur pemoh, krennet a-walh ar bleo warnañ, evid galloud brouda ar horv hag an izili. Ouspenn, ne laze morse al laou pe ar c'hwenn. Met n'o roe ket d'ar re-all ! Ha goulennet e-noa lavaroud an overenn gand dilhad ha ne zervijfent nemed dezañ.

E zae a oa ar baourra a gave, unan taolet kuit gand ar re all, stanket an toullou enni gand tammou seier. Hag a-wechou e kave an tu da rei eul lodenn euz e wiskamant d'eun den bennag paourroh egetañ. « N'oun ket dellezet, emezañ, da veza gwisket evel ar vreudeur all, rag ne doun-me nemed stronk en o zouez. »

Morse n'implijas seurt botou ebet e-pad 46 vloaz. Eun deiz ez eas eun tach en e droad. « Gwell a ze », emezañ. Ne dennas anezañ kuit nemed war urz an Tad Diwaller ha pa ne helle mui kerzoud.

E voued ? E-pad c'hweteg vloaz ne dañvas na gwin na kig, nemed klañv e vefe, ha hoaz ket ouspenn eur zizunvez. Daoust d'an amzer ha d'ar skuizder, eur pred bemdez hebken, d'an abardaez : bara ha dour. Ha peseurt bara ? Bara heiz, kerh pe 'fao, koz-louedet. An dour ? Hini diwaller pell amzer en eul lestr, ken fall ma vefe bet heuget eur hi gand ar gwel anezañ. D'ar goueliou braz, pa ne oa ket amzer unan euz an eiz koraiz a ree beh bloaz, e tebre Yann eur pred gwelloc'h : bara gwenn, viou ha boued dre laez.

Mignon e nesa.

Pa geste, daoust dezañ yuna, e ree e zeiz gwella evid kaoud d'e genvreur « gwin mat ha boued mat ». Ha mantret e veze pa ne helle ket kaoud kement-se.

A-hend-all, gand an oll e komze, hegarad-tre. Ne skuize den gantañ. Ha kalz a zeue da goves gantañ.

E kêr, e rede ar beorien war e lerh. Mond a reent d'e glask beteg en e gouent hag en tiez all. O zervijer e oa. Evito e houlenne aluzenn, evito e ree soubenn druz. E-pad naonegez ar bloavezh 1346 e vagas beteg 1.000 paour bemdez gand an aluzennou a reseve.

Eur wech, e teuas d'e gaoud eur vaouez estren gand he bugelig : « N'am eus netra evid e vaga », emezi. « Roit bara dezañ, Tad Yannig, pe a-hend-all e kasin anezañ d'ho kouent, ha red e vo deoh ober war e dro ! »

Mond a ree da weladenni an dud lovr, o chom er-mêz euz kêr. Divennet e oa fostaad outo. Med e dad Sant Fransez Asizi e-noa roet skouer dezañ. D'o haoud ez ee eta, evid o 'frealzi ; debri a ree en o ziez er memez plad ganto ;

Evid e genvreudeur e oa ar reolenn veo. Ne oe kavet netra da rebech dezañ e-pad an oll amzer ma vebas e kouent Kemper. Senti a ree ouz ar reolenn beteg en traouigoù disterra. Eur burzud kaer a-walh evid lakaad eur manah war roll ar Zent !

Burzudou.

Ha greet e-neus ar Breur Yann burzudou all Setu amañ unan bennag anezo. En eskopti Roazon e oa eur vaouez hag a oa zeizet he zeod gand an urlou. Edo an oll o hortoz gweloud anezi o tremen. Neuze e tegouezas Yann, o kestal evid e vreudeur. Truez e-nevoe ouz ar glañvourez. Lenn a reas eun Aviel warni. Gwellaad a reas dezi. Lenn a reas diou wech all ar memez Aviel. Neuze e savas

ar vaouez ; pareet-oll ha gouest da aoza merenn evid kenvreur ar Zant, e-pad m'en em denne hemañ da bedi.

Bez 'e oa eur Gemperadez hag a gare chopineta ! Dond a ree da goves gand an Tad Yann. Meur a wech e lavaras dezi he zad-koveseur chom heb eva gwin. « Ne hellan ket », emezi. « Abaoe va yaouankiz am eus karet eva. Kreñvoh egedoun eo ! » Prometi a reas ar Zant pedi Doue da rei dezi ar hras da drehi war he zech. Adaleg neuze e teuas-hi a-benn, hag evid mad, d'en em zivoaza diouz gwin. Hi eo hag a gontas kement-se d'ar manah a skrivas buhez ar Zant nebeud goude e varo.

Bremañ daou hant vloaz 'zo, d'ar 15 a viz Kerzu 1750, e teuas da gouent Kemper Mari-Julien Mauduit, gwreg Yann David, o chom e Kemper. Diskleria 'reas e oa he merh, Mari-Perrina, nodet he diouhar abaoe daou vloaz hanter. Daoust da galz a bedennou greet en ilizou disheñvel, ne oa tamm gwelleet stad ar hrouadur. Erfin he deus erbedet anezi da Sant Yann diarhen. D'ar pevare devez euz an naved e skoas Mari-Perrina an douar gand he divesker. Gand ar vamm eo sinet ar skrid-testeni.

Gwelidigez war an dazont.

Brezel a oa e Breiz en amzer Sant Yann. Daou zen a 'felle dezo beza duk er vro : Yann a Vontforz, a-du gand ar Zaozon, ha Charles a Vleiz, sikouret gand ar Hallaoued. Euz tu Montforz edo Kemper. Dond a reas Charles a Vleiz da lakaad seziz warni. Teir zizunvez e padas ar stourm. (Deg a viz Ebrel-kenta a viz Mae 1344.) Bemdez e lavare Sant Yann : « Kemeret e vo kêr ! » Ne greded ket anezañ. Prena 'reas kalz a vara, rag, emezañ, « keraouez a vo heb dale ». Goap a raed anezañ. Hogen, a-raog fin ar seziz, e oad laouen o tond da houlenn digantañ peadra da zebri.

Dond a reas ar Zaozon evid adkemeroud kêr. C'hweh ode a zigorjont er mogerious-divehnn. Yann, avad, a lavare ne grede ket e vije eet an trêh ganto. Hag, e gwirionez, e tehas ar Zaozon heb kas o labour da benn.

Aliéz, pa ree Doue dezañ da houzaoued eur gwallleur bennag en em lakee Yann da leñva doureg. Kement-se a hoarveze gantañ ivez pa wele tud a oa war-nez mervel. Gwela 'ree hoaz pa gomze diwar-benn madelez Doue, dreist-oll er gadorgoves. Gwall galet e ranke beza kalon ar peher ma ne geuzie ket neuze d'e behejou.

Ar Zant hag an Diaoul.

Ma kounnare an diaoul o weloud labour santelaad ar Breur Yann. Lavaroud a ree d'ezañ : « Koll a rez da amzer ol ober pinijenn, rag daonet out ! » En em ziskouez a ree dezañ dindan eur furm bennag, evel ma c'hoarvezas d'eur Zulvez Koräiz. Eur wech muioh e youhas dezañ : « Daonet out ! » Goude e skoas gantañ, dirag an oll vreudeur deredet. Spontet e oent oll o weloud pegen heskinet e oa ar Zant ha pegen disneuz e oa e zremm. Gand e viz e tiskoueze Yann an enebour. Den all, avad, ne welas Paol gornog. Pedi a ree ar Zant e-pad an amzer-se, en eur implij komzou ofis an deiz : « Va Doue, diwallit va ene diouz ar goaf, ha va buhez diouz skilfou ar hi. » Liez gwech eh adlavare : « diouz skilfou ar hi ». Pe hoaz : « Na dañlit ket ho torn war va Zent, na stignit ket lindagou d'am 'frofeted », pe : « Pellait diouzin-me, c'hwi oll drouk-sperejou a 'fallagriez ». Ken brao e teue gantañ ar mommou sakr-se ma weled mat-tre e komze ar Spered-Santel dre e henou. Hag an diaoul, trehet, a rankas e lezel.

Maro ar Zant.

E miz Here 1348, e krogas ar Breur Yann da ouela e-pad eun nebeud deveziou. Gwelet e-noa ar walenn euzuz a oa o tond war ar vro : ar vosenn. Ar hleñved-red-se, ganet en Azia, a holoas Europa a-bez. « Eun drederenn euz an dud a varvas », a skriv an historour Froissart.

Tizet e oe Kemper e miz Eost 1349. Dindan eun deiz pe zaou e kase ar hleñved an den d'ar vered. A-barz nemeur e oa leun ar berejou.

*« Me 'wel er vered eun dervenn
Hag en he beg eul liñser wenn :
Eet eo an oll gand ar vosenn. »*

(Bosenn Ellian.)

Neuze, muioh eged a-raog, en em ziskouezas karantez dispar ar Zant e-keñver e nesa. E-pad pemp miz pe dost e redas dre gêr ol ober war-dro ar re glañv, o sakramanti an dud war o zremenvañ, o sebelia ar re varo. Enno oll, hervez gourhemenn braz Jezuz, e wele bugale da Zoue, daoust da vreinañdrez ar horvou.

Eun deiz e oe e dro da veza taget. Pedi a reas beteg e huanad diweza, ha tremen, laouen o vond da weloud er Baradoz Jezuz hag e-noa servijet e vuhez-pad en e vreudeur reuzeudig, hag e Dad Sant Fransez Asizi, mignon mui-karet ar baourentez santel. D'ar 15 a viz Kerzu 1349 e oa.

Ar Zantig Du.

Eur mor a dud a zeuas da weloud ha da bokad d'e relegou. Darn a drouhas eun tamm euz e zae, darn all eur guchennad euz e vle. Sebeliet e oe en iliz ar gouent, dirag aoter Sant Anton a Badova.

Hemañ a oe lakeet war roll ar Zent bloaz war-lerh e varo. Yann, ivez, a oe roet prim dezañ gand ar bobl an ano a Zant. Deredeg a ree kalz a dud da bedi war e vez. Diwezatoh e oe lakeet e relegou en eun arhig. A-zioh ar relegouer edo skeudenn ar Zant, e breur kester, ar zah gantañ war e ziouskoaz. E du eo bet livet ar skeudenn-se e-pad eur hantved. Setu perag e vez greet euz Yann « ar Zantig du ».

Da vare an Dispah e oe serret kouent Sant Fransez. D'an iliz-veur e oe kaset relegou ha skeudennou santel ar japel. Med, d'an 12 a viz Kerzu 1793, deiz pardon Sant Kaourintin, e oe karget en eur harr oll relegou, skeudennou ha listri sakr an ilizou evid beza taolet en eur tantad.

Ken karget e oa ar harr ma kouezas skeudenn Sant Yann war an douar. Eur vaouez, kristenez dispart, an intañvez Boustouller, a zastumas anezi en he zavancher hag he huzas e ti he mab-kaer, Per Domaz, koñteller. Hemañ a roas anezi da iliz Sant-Kaourintin pa oe digoret an ilizou en-dro, en amzer Napoleon koz.

Hag ar relegou ?

En nozvez etre an 8 hag an 9 a viz Kerzu 1793, e teuas eur munuzer, Daniel Sergent, hag eun abostoler, Dominig Mougeat, da gemer en iliz-veur ar relegou a oa eno : breh Sant Kaourintin, lien an teir veradenn-wad, relegou Sant Ronan ha re Sant Yann diarhen. Kas a rejont anezo beteg presbital an Erge-Vihan. Degemeret e oent eno gand ar person touer, an Aotrou Vidal, hag a lakaas anezo en eur armel er sekretiri. Med an Aotrou m'ér Loedon eo a reas gward warno. War houlenn ar veleien douer, e oe restaolet d'an iliz-veur, e 1795, breh Sant Kaourintin, al Lien sakr ha relegou all. Re Zant Yann, avad, a zo chomet en Erge-Vihan. Nemed, e 1842, e oe roet d'an Aotrou 'n Eskob Graveran, eun askorn-penn. Ema en iliz-veur, en eur voestig, dindan skeudenn ar Zant, e-kichen aoter an Aelez Vad.

Da genta eo bet pedet Sant Yann evid kas kuit an droug-penn. Diwezatoh, emichañs peogwir edo e skeudenn e-kichen aoter Sant Anton, eo bet goulennet digantañ lakaad da gaoud an traou kollet. Bremañ eo brudet dreist-oll evid degas amzer vrao.

Bravoh hoaz e vefe pedi anezañ evid ma teuy karantez e-touez an oll. Ha sur, e plijfe muioh dezañ.

Kaourintin Riou.

Or Pesketaerien : kreski ment ar Bagou pe vervel

War gae Douarnenez emañ :

— Ahanta, Joz, mond a ra mad ?... Pegeid eo padet ar mare ?... Traou 'zo deuet ganeoh ?

— C'hwezeg dervez ! ha bihan ar gounidou ; poan zo bet avad ha skwiz maro om.

— Petra 'fell dit, Joz ; bremañ e rankit mond e moriou ar Nord. Setu perag e chomit keid all er mor.

— Ya da ! ganeom-ni ivez e kemer ar bagou braz plas ar bagou bihan ; emañ e tro da besketa evel chaluterien braz Boulogn.

— Sklêr eo dit ! D'am zonzj on eus lakêd ober re a vagou « malamok », 14 pe 15 metrad dezo, ha gouzoud a rez o-deus ar bagou-ze skarzet a besked ar moriou tosta d'an aochou. N'eus netra ken da ober gand chaluterien bihan.

N'on eus ket gouezet, pe n'on eus ket kredet gweled frank awalh. Bremañ ha nebeud-a-nebeud e rankim goulenn sikour armatourien hag a zo pouner o yalh ; ar re-ze a oar gweled hirroh eged beg o fri hag a ouezo touza ahanom !

— Ha penôz, a gav dit, e hellfem ni, martoloded, perhenna eur chaluter a 50 tonell ? Re gêr a goustfe !

— Gouzoud a ran eo kêr eur seurt bag ; med n'eus forz, red e vefe mond war rôg. Ha neuze, sikouret e vezer gand Kef-presta ar vartoloded (Crédit maritime). Lakom eur vag a 19 metrad, 50 tonell : koustoud a ra 18 milion, 9 milion a vo prestet gand ar hef, 6 milion a vo roet gand ar houarnamant ; ne jomfe mui nemed tri milion da glask.

— Ya, ne jom ket an armatourien da dorta ; med ar re-ze a anavez al lezennou.

— An dra-ze a zo eun afer all ; estregeto a anavez al lezennou ! Ma n'ho peus ket c'hoant da vond da vrennika pe da veskla heb dale n'eus nemed eun dra da ober : kaoud bagou brasoh, grêt evid mond da besketa e moriou an Nord, peogwir e ranker mond di ; bagou hag a hellor ganto mond da besketa toned gand *boued beo*, rag aze ivez e vo red cheñch doare : gand boued beo e vez gwelloc'h ar beskêrêz ha priz ar pesked a gouezo. Petra reot neuze gand mil pe bemzeg-kant ton paket gand ober ugent dervez ?

Kerse a gavot ma rankit mond da labourad diouz varhad, dindan ar re all : avel er gouelioù dre n'eus forz peseurt amzer, dond d'ar porz pa blijgo gand ar mestr. A veh emgavet diskarga ar pesked, kemeret boued, skorn, gazoal hag en avel adarre, goude 24 eur er porz !

Petra vo ho puhez neuze ? nebeud a amzer da ehana ; poan o klask mond da dremen eun eurig bennag etouez ho tud rag n'hellloc'h ket chom da labourad e Douarnenez pe er Gelveneg, red e vo deoh mond d'an Oriant pe da Gonk.

Milion a zo eur yalhad mad ! med arabad eo chom da nehi ; ma vez red, en em gleved etre daou pe dri.

✱

Setu kentelioù eur martolod koz. Petra ray martoloded Breiz ? Dija ez eus kalz nebeutoc'h anezo, tehet a ra ar yaouankizou daved ar bagou brezel pe ar bagou a genwerz. Teñval eo an amzer da zond evid martoloded ha pesketaerien or Bro.

(Diwar « Grand Large », Meurz 1956. **Marsel Kerneiz**.)

TENZOR AR BREZONEG BEO

Setu amañ war-lerh eun nebeud notennou bet kaset deom gand L. Lok.

NOTENN A-BOUEZ.

E-barz « Teñzor ar brezoneg beo » (*Bleun-Brug* Gwengolo-Here 1957) ez eus eur pezh-mouneiz faoz. *An Ene kristen e bali an Ee* — ar gêr diweza mañ a zo an hini mad — a zo bet skrivet gand Visant Roudaut. Buhez hag oberou ar skrivagner-mañ a zo bet displeget war *Arvor*, 22 Eost 1943 gand L. Lok.

NOTENNOU ALL.

13. **Alarm.**

N'eo ket anavezet ar gêr e Lokournan. Pa zon ar bleier e vez lavaret : « an tan gwall ». Bremañ, e-leh kleier ez eus eur zutell elektrik evid diskleria an tan gwall pe eur darvoud all. E Kastellin e sut disheñvel diouz ar pezh a hoarvez : tan gwall, beuzadenn, darvoud kirri-dre-dan ; hini an hent-houarn ive marteze a zo disheñvel.

17. **Anchal.**

Eun H a lakfen. Ar gêr-ze a vez implijet aliez war-dro Lokournan ; daoust da ze n'anavezan ket re vad petra 'dalv.

« Hanchal eo kaoud poan benn. » — « Ho remejou n'int ket hanchal ? »

19. **Anjelus.**

Arag ar brezel 1914, pa zone an Anjefus, e veze gwelet an dud o tarda gand o marhajoù war plasennou ha ruiou Lokournan, ar wazed a jome diskabell. Lavaret e veze an anjelus gand kalz tud ha grêt sin ar groaz gand méz ebed.

Da zadorn, da zul ha d'ar gouelioù, da 10 eur diouz an noz, e veze brallet eur hloh all ouspenn an anjelus, da lavared d'an dud mouga ar goulou ha laha an tan en tiez ha serra an ostalerioù.

15. **Ano.**

Souezet on bet o lenn ar pennad-mañ. E Lokournan e vez lavaret peurliesia : « *Pe oad out ? pe oad eo ? Maro Jan, 70 oa.* » Eur vaouez a lavar ivez : « *Tri miz own* », da lavared eo ez eo dougerez tri miz a zo.

Implijet eo ar verb *beza* evid ar muzulioù : « *Tri-ugent lur eo* » (pouez) — « *Eur meur eo* » (ment).

22. **Aozedet.**

N'anavezen ket ar gêr-ze. Med anaoud a ran *grougnoun*, ha *grougnounnig* evid lavared ar pouloudennou a vez er bleud koz.

25. **Abilhetez.**

Du-mañ e veze lavaret gwechall *founilh* evid an *entonnoir* ; bremañ : *tinouer*.

29. **Alhwez.**

Hag ive : *spilhenn groched, spilhenn zoubl*.

30. **Alvaoni.**

E Lokournan, *alvaon* = *radoteur*.

32. **Ampar.**

Lennit war « *Brud* », niv. 2 : *raouenn*, muzul gand biz bihan ha biz meud astennet, an tri biz all pleget. « *Raouenn a zo etre an divronn.* »

35. **Aresed.**

Gwechall e veze muzulet ar greun : Eur mên, doare eur volenn vraz, gand diskouarn, a veze ar muzul evid an deogou, ar gouel-mikelioù, an deverioù. Douget e veze war al liziri-marhad : « *mesure comble, mesure rase* ». Lakaad *a-reaz* oa leunia ar muzul ha tenna gand eur rozell ar greun a veze war gorre ar plean.

44. **Astell.**

Kemend a zisheñvelidigez a oa etre ar muzulioù euz eur barrez d'eben ma n'eur ket evid lavared mad peñra a dalvezent.

47. **Atao.**

An doare komz-se, gand *toujours* a vez kavet ive e galleg pobl.

58. **Atapi.**

« *Atapiet co...* » : douget eo da...

7. **Batouilhad.**

Daoust ha n'eo ket « *patouilhad* », diwar ar galleg « *patouiller* ».

10. **Beel.**

Ar ger *bedel* (jatte en bois) a gaver er geriadurioù.

Lizerenn A (notenn V. Favé) :

63. **Allaz !**

N'ouzon ket ! « *Peur e teuy da dad d'ar gêr ?* » — « *Allaz !* ». (Kleder.)

V. F.



N	E	S	A		B		I
O		E	O	N	E	N	N
M	A	N	T	I	L	L	I
I		I	R	V	I	N	
N	B		E	E			O
O	A	N		R	E	U	D
E	M	E	Z	I		R	U
A	Z				A	Z	E

GERIOU - KROAZ


Diskoulm da gudenn an niv. 103 - 104.

A-led.

- I. A ra d'an dud sevel o zreid.
- II. Teir lizerenn euz « *ablamoù* ». - Ragano.
- III. Karantezuz.
- IV. N'eo ket daou.
- V. Diwall !
- VI. Ar fin. - A dleom da zavetei.
- VII. Heb an dra-ze.
- VIII. Awechou a vez du. — Lod euz ar hezeg henn gra.

A-bik.

1. Goude beza bet kousket.
2. Ebarz.
3. Ober evel ar yer.
4. Euz ar verb « *beza* ». - Penn kenta an unvaniezh.
5. E peb ti ez eus unan, med houmañ a zo dezañ. — Lost ar gazeg.
6. Ober jestrou.
7. Peb den e-neus e hini. — N'eo ket hi eo.
8. War gorre. - N'eo ket an uhella.



Embannadurioù "EMGLEO BREIZ"

« FONDATION CULTURELLE BRETONNE »
Boîte Postale 17, Brest, C.C.P. 380-96 Rennes

Lexique Breton-Français et Français-Breton
(Stephan-Seite), 330 francs, franco.

L'Orthographe Universitaire de la Langue Bretonne
(Falc'hun-Dujardin), 180 francs, franco.

Komzom, Lennom, ha skrivom Brezoneg
(J. Tricoire), 280 francs, franco.

Mil Pok (Pezig-c'hoari en eun arvest, gand J. Noel),
50 francs, franco.

Seiz Pennad-Lenn, 50 francs, franco.

Mojennou ar Mor (Pierre Hélias).
Edition Jos Le Doaré, 280 francs, franco.

Geotenn ar Werhez (Jakez Riou), 380 francs, franco.

Barzonegou (Reunan ar Mough), 195 francs, franco.

Gand Red an Dour (Roparz Broudig), 195 francs, franco.

Dasson ur Galon (Loeiz Herrieu).
evid Skolioù Bro-Wened, 330 francs, franco.

An Azennig bihan (evid ar vugale), 180 francs, franco.

Ar Roh Toull (Jakez Kerrien), 330 francs, franco.

Textes de Thèmes (Pierre Trépos).

Bleunioù Arvor (Mab an Dig).

DINDAN AR WASK


Eur Honiklig Boudedeo. (Evid ar vugale.)

Deskom Brezoneg (Seite-Stephan).

Bilzig (Franch al Lay).

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan.

QUIMPER, IMPR. CORNOUAILLAISE — C.P.P.P. N° 21697



Chapel Itron Varia ar Peoh er Pouldu